

BREURIEZ AR WIR GANERIEN



SAVET GANT AR JABADAO

a gan

son An Itroun war Vôr

Diskan

Ehamptira, tirediredi.
Ehamptira, tiredireda.

- 1. Enn Oriant zo 'n em gavet
Eur vatimant karget a ed.
- 2. Eur vatimant karget a ed.
Deuit holl, merc'hed, hag hi gwelfet !
- 3. Merdead, pegement an ed ?
Seiz lur, itroun, am euz kavet.
- 4. Seiz lur itroun, am euz kavet.
Deuit war ar pount, hag e welfet !...
- 5. Ar c'habiten laraz neuze
D'e vartoloded en deiz-ze :
- 6. Boutit d'ar frank, martoloded !
Eur plac'hik koant am euz tapet.
- 7. Ar plac'h iaouank a lavaraz,
D'ar c'habiten, pa e glevaz :
- 8. Klevit, me zo merc'h d'eur baron ;
Na gouskan ket gant paotr godron
- 9. Me zo merc'h d'eun den a enor ;
Na gouskan ket gant tud a vor.
- 10. Me zo merc'h d'eur c'huzulier ;
Na gouskan ket gant eur preizer.

- 11. Ar c'habiten laraz neuze
D'ar plac'h iaouank, pad he c'hleve.
- 12. Klevit, plac'hik, gourdrôuzit ket,
Kerkoulz ha c'hwi oc'h euz kavet.
- 13. Rak, me zo mab d'eur preizer mad,
Hag en deuz c'hwec'h biz war bep troad !
- 14. Hag a bep amzer ma zud me
O deuz bet talvezet d'ho re !
- 15. Martoloded ann Oriant
A zo meurbed paotred friant.
- 16. Na pa vefec'h merc'h d'ar Roue,
An noz man 'kouskfot ganin me.
- 17. An noz man 'kouskfot ganin me
An noz a zeu gant egile...
- 18. Lakit 'n taboulin en tro kear :
Kollet gant hi he zavancher.
- 19. Lakit 'n taboulin er c'hantoun :
Eat e 'n dimezel da itroun.
- 20. Pemp kant mil skoed hi deveuz bet,
Evit he c'hampagn tremenet.
- 21. Nag eur mab bleo melen frizet...
Petra 'n deuz den da lavaret ?